

# AR VUHEZ KRISTEN



AVENUE DE LA MARNE

28

LORIENT

C/C. POSTAL N<sup>o</sup> 209-81

SUR

NANTES



## Koumanantchou

Koumananti a c'heller e pep amzer eus ar bloaz. — Skriva an hanoioù hag an adress fraez ha penn-da-benn : ma n'eus bureo post ebet er gomun, lakat gant pehini e vez graet.

Koumanant ordinal : **61.** ar bloaz.

Koumanant a enor : **10.** ar bloaz, gant perz e 365 OFERENN (unan demdez) a vez lavaret bep bloaz evit hor madoberourien.

N.-B. — Hol lennerien, m'o deus c'hoant, a c'hell dreizo o-unan rei frouez an oferennou-se d'o zud varo.

## Adkoumanantchou

An neb a vez echu e goumanant, a vez kaset d'ezan dre ar post eur « MANDAT-CARTE » evit ma c'hello koumananti a-nevez. —

Ni a gont war bolontez vat hol lennerien evit paea rak-tal.

An neb n'en devo ket paeet **TRI MIZ GOUDE**, ne resevo mui ar c'laouenn.

**TAOLIT EVEZ** : lavarit atao petra 'zigasit d'eomp : **EUN ADKOUMANANT** pe **EUR C'HOUMANANT NEVEZ**; ma tigasit asamblez adkoumanantchou ha koumanantchou nevez, **DISPARTIA MAT ANEZO**. — Evit eun adkoumanant, rei d'eomp an adress eun **EVEL MA OA WAR AN NIVERENN DIWEZA...** ha ma'z eo ret, goulenn da-c'houde chanj anezi.

## Chanj adress


Evit chanj adress, digas d'eomp 4 real e timbrjou gant an adress evel ma oa war an niverenn diweza.

## Liziri ha skridou

An holl liziri ha skridou (koumanantchou, adkoumanantchou, penadou-skrid evit ar gelaouenn, pedennou goulennet evit ar re vario pe intansionou all, keleier a bep seurt) a dle beza kaset da :

M. le Directeur de « Ar Vuhez Kristen »,  
28. avenue de la Marne, Lorient, Morbihan.

C.-C. 209-81. Nantes.



## Karomp lavaret hor chapeled

Sant Yann Vadezour la Salle, an hini en deus savet Urz Leaned an Deskadurez kristen evit ober skol d'ar vugale baour, ne dremenas deiz ebet hep lavaret e chapeled :

« N'heller ket, emezan, ober pedennou da blijout muioc'h da Zoute eget ar Bater hag an Ave. Ar Bater eo ar bedenn desket d'eomp gant Hor Mestr e-unan; ar genta lodenn eus an Ave a zo deuet deomp ivez war eun eus an Nenn, hag an eil lodenn a zo bet savet gant an Iliz. »

E pep lec'h e lavare e chapeled. Pa dremene dre ar ruioù, e veze gantan e chapeled dindan e soudanenn hag e lavare anezan gant doujans vras. Pa veze o veachi, e rae henvel, hag ar c'hiz-se en deus lezet gant e Leaned, ar pez a ro d'ezo eur stumm dereat ha poellek.

O aliet en deus ouspenn da zeski d'ar vugale fiziet enno lavaret ar chapeled gant resped.

An dud vras, an dud a renk uhel, an dud gouizieki o deus karet hag a gar ar chapeled.

Bossuet, eskob Meaux, ken brudet dre e brezegennou hag e skridou, en doa laket e hano e Breuriez ar Rozera hag a lavare e chapeled.

Sant Visant a Baol, sant Fransez a Sal, an aotrou Olier, diazezour kloerdi bras Sant Sulpis e Paris, a oa holl mat da lavaret o chapeled.

Rouaned, impalaered, evel Edouard trede, roue Bro-Saoz, Charles V, impalaer an Aotrich, Sigismond ha Kasimir, roua-

ne ar Pologn, ha meur a roue e Frans, o deus graet hienvel. An Tad de la Rue, Jezuiet, a gavas eun deiz ar roue Loeiz XIV o lavaret e chapeled :

« *Marteze oc'h souezet, a lavaras ar roue d'ezan, met n'em eus ket a vez o tiskleria e lavaran va chapeled; ar c'hiz-se a zo bet desket d'in gant va mamm, ha derc'hel a rin d'ez.* »

Epad ar brezel bras, jeneraled a lavare o chapeled.

Ha ni, perak ne lavaromp ket bemdez hor chapeled ? Ezomm hon eus da veza sikouret gant Doue e-kreiz poaniou ar vuhez war an douar-man hanvet an draonienn a zaelou, Grasou Doue a zeu d'eomp dre Vari. Hi eo ar grouadurez dispar laket etre an Nenv hag an douar, etre Doue hag an dud.

Dreizi e tleomp kas hor goulennoù da Zoue, hag e vezint selaouet. Dreizi, dre he daouarn eo e tremen grasou an Nenv. Dreizi eo deuet, evit ar wech kenta, Jezuz, Salver ar bed. Ar pezh a ra Doue a zo graet mat hag a chom graet. Dre Vari, e Vamm hag hor Mamm, eo e kendalc'h Jezuz da skuilh warnomp e vennoz.

En eur lavaret hor chapeled, pleustromp war ar misteriou : eun dervez war ar misteriou a joa, eun dervez all war ar misteriou a geuz, hag eun dervez all war ar misteriou a c'hloar.

Ar misteriou a joa a zesko d'eomp beza izel a galon, distaga hor c'halon diouz traou ar bed-man, karet labourat ha senti.

Ar misteriou a geuz, o lakat dirak hon daoulagad poaniou Jezuz epad e Basion, a roio d'eomp nerz da zougen hor c'hroaz, da c'houzanv hep en em glemm poaniou ar vuhez-man.

Ar misteriou a c'hloar a ra d'eomp trei hor spered etrezek an Nenv, hor bro gwirion, e-lec'h ma vezimp eürus da-viken, ma karomp war an douar-man en em ziwall diouz ar pec'hed ha servicha Doue.

Lavaromp hor chapeled; bemdez, pedomp hor Mamm eus an Nenv, hag e vezimp diwallet ganti.

## ***N'em eus ket a yec'hed...***

Nag a wech ne vez ket klevet an digarez-se, pa gomzer eus gwaska an techou fall ! Hor Salver Jezuz-Krist, an Iliz hor Mamm, a c'houre'hemenn ober pinijenn evit beza salvet.

Respontet e vo : *n'em eus ket a yec'hed, ... me a zo re yaouank, ... me a zo re goz, ... me am eus eul labour re boanius, h. a.*

Bez'ez eus kant ha kant doare d'ober pinijenn hep noazout d'ar yec'hed, mat evit tud a bep oad hag a bep stad.

\*\*\*

### a) EVIT AR PEZ A SELL OUZ AR C'HORF.

Kemerit an amzer evel n'eo rôet gant Doue, hep klemm ebet : an domnder, ar yenijenn, an naon, ar sec'hed, ar c'hlenved hag ar c'hollou.

Na zebrit ket, hep ret, etre ar prejou. Na zebrit ket re vuan. Er prejou, na vezit ket lipous; roit d'ar re-all ar pezh a garit ar muia.

Kemerit dour benniget, na pa vefe yen, ha grit sin ar groaz war ho tal.

Taolit evez war ho taoulagad, war ho taouarn ha war ho holl skianchou.

Labourit gant kalon, diouz ho nerz, ho kalon gant Doue.

Bezit prest atao da sikour an nesa; met goulennit, an nebeuta ma c'hellit, sikour digant an dud.

Mar doc'h klanv, sonjit ez eus kalz tud hag o deus gwasoc'h klenvejou.

Mar doc'h paour ha ma hoc'h eus poan beva, sonjit pegen paour ha pegen disprizet n'eo ket bet Hor Salver hag an Itron Varia.

Bezit eürus, pa vank d'eoec'h eun dra bennak.

An Aotrou Doue a zo en ho kichen, a zo memes ennoc'h.

Netra,, e gwirionez, ne vank d'an ene kristen, pa vez e gras hag e karantez Doue.

b) EVIT AR PEZ A SELL OUZ AR SPERED.

Tec'hout diouz ar pec'hed, evel ma tec'her diouz an naer-wiber.

Tevel, pa na lavaret nemet komzou goulo.

Karit ho kerent, met na garit ket re den all ebet, memes an den fura; ar gwella gwin a dro a-wechou e gwinegr.

Beza joaus ouz an holl; na rit daoulagad rouz da zen ebet.

Mar hoc'h eus bugale, beñh! warno; roit d'ezo aliou mat ha skoueriou santel.

Na glaskit ket kac'her an tu krenva war re-all.

Respont atao gant dousder, dreist-holl d'eur gomz dichek.

Da wener, lakaat ar spered da sonjal e Pasion Hor Salver.

Lavarout eur bedenn, a-raok kousket, evit ar gerent marvet.

Tevel, pa veza tamallet e gaou.

Tevel, pa ne vez lavaret netra enep ar feiz pe enep ar furnez.

Diwall da zroukprezeg ha da c'hrozmolat ouz ar re n'emaint ket dirazoc'h.

Lavarout eun Ave Maria evit an hini en devo skandalet ac'ha-noc'h.

Ober eur binijennig kement gwech ma tigouezo d'eoç'h droukprezeg diwar-benn an nesa.

Diwall d'en em veuli hoc'h-unan.

Na rit netra evit klask meuleudi an dud.

Poueza ervat war ho komzou.

Kaout pasianted gant an holl, rak an holl o deus pasianted ganeoc'h.

E barz an ti, rei eur plas da bep tra, ha lakaat pep tra en e-blas.


Karout al labour a zisplij ar muia.

\*  
\*\*

Gellout a reer astenn al listenn-se. Nit ket eta da veza spontet, pa glevit ez eo ret-mat « ober pinijenn, evit beza salvet. »

Mar hoc'h eus kemeret poan da lenn, e welit ervat e c'hellit ober pinijenn ha gwaska ho techou fall hep ober an distera gaou d'o yec'hed.

T. F.



## Buhez ar Werc'hez Vari e Nazared

*N'ouzomp ket kalz a dra diwar-benn buhez ar Werc'hez en Ejipt, n'ouzomp ket kalz muioç'h diwar-benn he buhez e Nazared. An Aviel ne lavar d'eomp, koulz lavarout, ger ebet eus an amzer-se a hanver « buhez kuzet » Jezuz ha Mari.*

*Aes eo d'eomp evelato, rak anaout a reomp santelez ar Werc'hez, gouzout penaoz e tremenas hec'h amzer e kerig Nazared.*

*Eno, koulz hag e pep lec'h e-pad he buhez a-bez, ar Werc'hez Vari a voe izel a galon, a bedas hag a labouras.*

\*  
\*\*

*Ar Werc'hez a oa izel a galon. Nazared n'oa nemet eun toullig kêr, kollet er menezioù ha brud ebet d'ezì.*

*Mari, ouspenn-se, a veve sioulik en he zì. A-dra-sur e veze laouen ouz an holl ha karantezus e keñver kement hini a oa ret d'ezì kaout darempred ganto, kerent, mignoned hag amezeien.*

*Tec'hout a rae evelato, muia ma c'helle, pell diouz trouz ar bed, evit beza holl da Jezuz. Den ne ouie a-hend-all e oa Mamm da Zoue, hag evit an holl e Nazared n'edo nemet eur vaouez heñvel ouz ar re all, gwreg Jozef ar c'halvez.*

\*  
\*\*

*Labourat a rae ivez ar Werc'hez. Ne oa ket a blac'h ganti. Hec'h unan e rae pep tra war-dro an ti : kempenn o dilhad*

da Sant Jozef ha d'ar Mabig Jezuz, mala ar greun, hervez  
giz ar Sav-Heol, gant ar maen-milin bihan a gaved e pep ti,  
poazat ar bara war ar c'hlaouiadenn, aoza ar prejou, mont  
d'ar feunteun da gerc'hat dour ha d'ar poull da ober he  
c'houez.

Na kaer eo gwelout ar Werc'hez dinamm, Rouanez an  
Nev hag an douar, Mamm an Aotrou Doue, oc'h ober, gant  
levenez ha gant karantez zoken, distera labouriou a gaver. En  
he c'hichen koulskoude eman Mab an Tad eus an Nev, deuet  
da veza bugel eur verc'h a Israel, hag a labour hirio gant  
Jozef war vicher galet ar c'halvez.

\*  
\*\*

Ar Werc'hez Vari a bede. Ne ankounac'hae ket sklaer eo  
talvoudusa doare da dremen hon amzer, meuli an Aotrou  
Doue, kana bemoz d'ezan, goulenn e skoazell digantan;  
Mari a bede hep ehana, hag he fedenn a oa ken entanet, ken  
birridik, ma ne c'hellomp ket kompren pegen skanw e save  
d'an Nev.


Diouz ar mintin, diouz an noz, a-hed an deiz, e pede, en  
eur zebri, en eur gomz gant Jozef ha dreist-holl gant Jezuz,  
rak komz gant Jezuz, daoust ha n'eo ket ar wella eus ar  
pedemou. Pedi a rae zoken en eur gousket. Ya ! dre eur  
burzud, spered ha kalon ar Werc'hez, zoken dre he c'houisk,  
a c'helle chom unanet gant Doue ha kenderc'hel da lavarout  
d'ezan he c'harantez.

\*  
\*\*

Kemeromp skouer diwar ar Werc'hez Vari ha karomp  
evelli beva kuzet e-kichen Jezuz o pedi hag o labourat.

Tec'homp gant euz diouz kement a c'hellfe hor pellaat  
diouz Jezuz. Dre eno hepken eo e c'hellimp beza eürus war  
an douar-man, a-raok mont eun deiz d'ar baradoz e-kichen  
Jezuz, Mari ha Jozef.

B. MEDARD.



## Chom er Ger

*Chom er gêr, va c'halon, O ! chom,  
Er gêr eo brao, er ger eo tom;  
Eus ar gêr ar galon a dec'h,  
Ne gavo diskuiñ e nep lec'h.*

*Chom er gêr, rak galoupat bro,  
A-zehou, a-gleiz, nijal diouz tro,  
A vefe sur, o goulmig gouez,  
Eus da anken kreski ar bouez.*

*Chom er gêr, çhom eno, noz-deiz,  
Gwir blas al labous eo e neiz;  
Pe zi a-dreuz, pe zi a-hed,  
Gant e skilf, ar sparfel da c'hed.*

*Chom er gêr, çhom, o traig paour,  
Peoc'h ar ger a dalv peziou aour;  
Goudor, er gêr, te a gavo,  
Ha klemm da drubuilh a davo.*

J. L'HELGOUACH. O.M.I.

1-9-34.

Ha mat eo d'eur c'hristen lenn eur gazetenn fall ?  
*N'eo ket...*

Ha gwir en deus eur c'hristen da lenn eur gazetenn fall ?  
*N'en deus ket...*

Ar rezoniou a glask eur c'hristen evit lenn eur gazetenn fall, ha mat ha talvoudus int dirak Doue hag ar goustians ?  
*N'int ket...*



Eternite ! !

O ! ger spontus !

KELENNADUREZ KRISTEN

## Mister an Eternite

Eternite !... Ger doun hag uhel !... ger souezus ha spontus !...

Ma c'houlennit diganen petra venn lavaret ar ger se, me a responto d'eoec'h eo, war eun dro, aes ha diaes hen diskouez : aes, rak n' eus poan ebet o lavaret e pado *DALC'H-MAT* eun dra *ETERNEL*; — diaes, rak re striz eo spered an den evit gwelet ha kompren holl ar pezh a zo er ger « *DALC'MAT* !... » « *BEPRED* !... »

Petra eo eur bloaz, dek vloaz, ha kant vloaz, ha mil bloaz, ha kant gwech mil bloaz ?... her gouzout a reer, rak kement-se a c'heller kompren. Met « *DALC'HMAT* !... » « *BEPRED* !... » hep fin ebet !... Pïou a c'hello biskoaz kompren ?...

Muzula a c'heller kement tra a zo : eun hent, eur park, ar mor, an douar,... ha pet leo a zo eus Gwened da Bariz, hag ivez pet leo a zo eus an douar d'an heol : seiz milion ha tregont !... pet leo a ra ar sklerijenn en eur segond : pevar ugent mil !... N'ez eus nemet eun dra n'eo ket bet biskoaz ha ne vezo morse muzulet : *An Eternite*.

C'houi a garfe koulskoude gouzout, bras pe vihan, pegeit amzer a c'hell padout enn dra eternal,... pegen hir e vezo an Eternite ? ...

Neuze diwallit da sonjal en eur bern traou war eun dro, da gemeret gerioù bras evel milion... pe miliard !... An dra-se ne grog ket er spered.

Sonjit kentoc'h e traou dister, traou a anavezit hag a

welit dirak ho faoulagad...; ha kemerit gerioù a gomprenit mat, evel : — dek, — kant, — mil; traou a-walc'h a vo evit teurel ar spont en ho spered, ma c'hoantait a-zevri gouzout petra eo an Eternite.

\*\*

Fun deiz, pell-bras a zo abaoe kement-se, enn den desket bras ha santel ivez, rak dalc'hmatao e oa troet e spered war-du an traou uhel evit klask ar penn anezho, a lavaras da Zoue ar bedenn-man :

« O Doue eternel, taolit em spered eun tammik sklerijenn, ma c'hellin gwelet, eun nebeudik, petra eo an Eternite !... »

Raktal e kouezas fousket e'houek. Ha setu ar pezh a welas hag a glevas :

« Eun él, emezan, eun él deuet eus an Nenv a lavar d'in :  
— E-kreiz da liorz, dirak da di, gwelet a rez ar wezenn-se gofoet he brankou a zeliou glaz ?  
— Ya, él an Aotrou Doue, m'her gwel, ar wezenn-se.  
— Te lammo diwarni he holl deliou, en eur zistaga eun delienn, unan hepken, bemdez. Pa pezo echu, am galvi.

Hag an él da nijal trezek an Nenv.

Ha me chomet, n'oun dare pet kant vloaz, dirak ar wezenn-se, evit distaga eun delienn bemdez. A vec'h distaget an hini ziweza, e c'halvan an él. Hag hen, 'n e sav dirazoun :

— « O ! él, nag hir eo bet an amzer am eus tremenet aman : eun eternite !... »

— « Fazio 'rez. An eternite n'eo ket berraet eus an disterra minutenn abaoe m'out kroget gant da labour ; daou c'hant pemzek vloaz ha tri-ugent hepken out bet o tistaga deliou ar wezenn-se ; rak hant gwech mil delienn a oa er wezenn... Met, n'eo netra kement-se !... »

Hag an él da lavaret :

— « Evit gouzout petra eo an Eternite, eul labour all ac'h eun eur hepken. — Te wel du-hont, war kostez ar menez, eur

eun tammik pelloc'h, karget ivez a zeliou glaz. Te lammo he deliou holl, met o tistaga eun delienn, unan hepken, bep bloaz. Ha va galv, pa pezo echu. »

Ha me chomet, ne ouezan ket pegement a gantvejou dirak ar wezenn-se, o tistaga diouti eun delienn, unan hepken, bep bloaz... Hir spontus e kavis an amzer !...

Rakse, o tistaga an delienn ziweza e krian krenv-krenv war an él. Hag hen dont dioustu.

— « Er wech-man, a lavaris d'ezan, em eus graet eur pennad mat a hent en eternite ?... »

— « Abaoe m'out kroget gant da labour, — setu eus an dra-se kant gwech mil bloaz, pe : kant mil bloaz, — An Eternite n'eo bihannaet na berraet eus an disterra minutenn... »

Hag an él a lavaras d'in :

— Evit gwelet petra eo an eternite, ac'h eus eul labour-all d'ober.

« Gwelet a rez an toulladig gwez-se a zo en tu-all d'al liorz : dek gwezenn a zo anezho. Gra an hevelep labour evit pep-hini eus ar gwez-se, o lammet eun delienn bep bloaz. Pa pezo echu, e lavari d'in, ha me deuo da lavaret d'it : dek gwech kant mil bloaz eo padet da labour, pe eur milion a vloaveziou.

— « O va Doue ! emeze, spontet. Met, neuze, ha bihannaet kalz e vezo an Eternite ?... »

— « An Eternite ne vezo ket zoken bihannaet na berraet eus eun eur hepken. — Te wel du-hont, war kostez ar menez, eur c'hoad brasoc'h eget an hini a zo en tu-all d'al liorz. N'eo ket unan na diou wezenn a zo ennan, met mil gwezenn... Gra an hevelep labour evit pep-hini eus ar gwez-se Pa pezo echu, te a grio warnoun, hag e teuin da lavaret d'it e vezi bet e-pad mil gwech eur milion a vloaveziou o labourat, pe : eur miliard a vloaveziou... »

— « O ! El an Aotrou Doue ! C'houi a daol ar spont em spered !... »

— « Spontet out gant eur miliard a vloaveziou. Petra eo koulskoude an dra-se, e-kichen an Eternite ? — Netra !... evel n'eo netra ar-c'hoad bihan-se, — out bet ken pell amzer o tistaga e zeliou, unan bep bloaz, — e tal ar c'hoajou-all a zo er barrez, en departamant, er Frans a-bez ?... netra e skoaz ar c'hoajou bras a gaver en Afrik, en Amerik, e pevar c'horn an douar... »

« Nann !... Netra !... rak mar d'out bet eur miliard a vloaveziou o tizeliaoua ar c'hoad bihan-se, pet kant mîl miliard a vloaveziou a vezo ranket kaout evit ober al labour-se da holl gwez ar bed a-bez ?... »

— « Ha pa vezo echu al labour-se, penaos e vezo an Eternite ?.. »

— « An Eternite, chomet atao en he fez, hep beza boulc'het, ne vezo ket berraet zoken eus eun dervez hepken !... »

Hag an él a lavar c'hoaz d'in : Eternite!.. O ger spontus!.. Dale'hmat !... Dale'hmat !... Bepred !... hep fin ebet !... hep penn ebet !... Eternite !... O ger spontus !...

Met, an Eternite-se n'eo ket goullou.

Bez' ez eus tud o veva enni,

Hag e vevint enni da-virviken :

Met, — hag aman eman an dalc'h :

ER BOAN ?... EL LEVENEZ ?...

MELEGAN.



« Eus Doue e komz d'in arme vras ar stered,

O dremm skedus, o lagad aour;

Kement diwar e benn a lavar d'am spered

Bleun nevez en o dilhad paour. »

## DEVERIOU AR C'HRISTEN

### Ar Silvidigez

Perak n'en ent lakafemp da serviya Doue ervat bremañ ? Pïou a c'hell lavarout e vevo c'hoaz eur bloaz, eur miz, eun devez hepken ? Nag a dud a welomp o vervel, pa soñjemp e oa pell ar maro diouto.

Kement-all a c'hell digouezout ganeoc'h. N'ankouma-c'haomp ket eun dra : diwezat eo kregi en eul labour, pa vez deut ar c'houlz d'hen echui.

Kalz a dud a grog eur pennad gant labour o silvidigez. Hogen ne zalc'hont ket mat gantañ. E lezet a reont a-raok pell, evit an distera tra, evit an distera poan, a-wechou zoken evit an distera tentasion.

Daoust ha n'omp ket, ni, eus an dut-se ? N'hon eus ket staget eun tamm gant al labour-se hag e lezet a gostez abred ? Pet retred hon eus graet ? E pet mision omp bet ? E-pelec'h emañ ar frouez hon eus tennet anezo ? Kemeret hor boa an hent mat. Ha bremañ emamp war an hent fall. Soñjomp er c'homzou-mañ :

« An hini en devo dalc'het a-du gant Doue betek ar maro, hennez a vo salvet. »

\*  
\*\*

Ha soñjet em eus ervat er pezh a dlee beza doun em spered hag em c'halon. Petra am eus graet e gwirionez evit savetei va ene ? An c'hontrol eus ar pezh a dleen ober. Senti ouz va fenn fall, heulia va gwall dechou, klask va brasa plijadur, beva bepred d'am soñj, setu penaos eo bet an traou ganin.

Mar lakafen va danvez, va enor, va buhez zoken e riskl da veza kollet, daoust ha ne vefen ket sellet evel eun den diboell ? Setu koulskoude ar pezh am eus graet evit va ene. E lakaet em eus e riskl da vont d'an ifern.

*Petra a zeufen da veza, mar tigouezfe ganin mervel bremañ ? A, va ene, sonjomp ervat hizio en hor silvidigez.*

*An hent frank am eus bet kemeret, rak aesoc'h e gaven. Ha pelec'h emañ-me bremañ ? Penaos ober evit dont endro ? Sellit ouzîn, va Doue, selaouit-ouz va mouez, astemit davedoun ho tourm, ma vezin tennet ganeoc'h eus ar fank. Roit sklaerder d'am spered, evit ma welin va dallentez, roit nerz d'am youl evit ma kemerin an hent striz a gas d'ar Baradoz.*

\*  
\*\*

*Alies em eus graet promesaou kaer da Zoue. Met n'em eus ket dalc'het d'ar pez a c'hrataen. Goulennet em eus harp digant Doue, ha me ne boanien ket.*

*Pedet em eus Doue d'am selaou, komzet en deus alies ouz va c'halon, ha me ne selaouen ket.*

*Lavarout a ra d'in gant douster eun tad karantezus*

*« Va bugel, petra 'servij d'eun den gounit ar bed holl, ma teu da goll e ene ? »*

*Da betra e servijo d'it ivez, en eur ar maro, an danvez-se ac'h eus kemeret, ar froudennou ac'h eus heuliet ? A !, gra bremañ ar pez a garjes beza graet neuze. Soñj ervat ha kemer an hent mat a-raok ma vo re zivezat.*

*Ha koulskoude pegoulz ha penaos e soñjan em ene ? Jezuz-Krist en deus soñjet hag a soñj c'hoaz em silvidigez. Heñ a garfe e ven salvet; ha me, kriz a-walc'h oum ouzîn va-unan evit ankounac'haat va silvidigez.*

\*  
\*\*

*Belek pegoulz e c'hortozin evit digeri va daoulagad da welout teñvalded va dallentez a-zivout silvidigez va ene ?*

*Alies e tremene dre va spered ar soñj eus va silvidigez. Met dalc'hamat e tennen a-dreñv, e lezen se a-benn diwezatoe'h, e sell d'ober gwelloc'h war-lerc'h.*

*En amzer ma oan bugel, ne soñjen ket kalz em silvidigez.*

*Em yaouankiz e sellen ouz ar re-all evit ober evelto hag evit beza deut mat ganto. Muioc'h e oa va c'halon gant an*

*traou kaer eget gant va silvidigez. Klask a raen en em uhelaat er bed, ne glasken ket penaos savetei va ene.*

*Mont a ran bremañ war an oad, ha, pa zeu em spered ar soñj-se, e lavaran aes kaer :*

*Diwezatoe'h e labourin war gement-se, pa vezin dizamet eus an dra-mañ hag an dra-se.*

*Ha n'eo ket evelse, eus an eil strevel d'egile, e foraner ar vuhez war an douar hep soñjal er Baradoz ? Pebez dallentez !*

*Gouzout a ran c'hoaz em eus kemeret meur a wech an hent mat; ha kaout a rae d'in e kerzen emañ a zevri, da vat. — Siouaz ! An distera skousell en deus graet d'in chanj hent : en hevelep techou e kouezen, an hevelep plegou a gemeren adarre. Bremañ e fell d'in ober gwelloc'h.*

*Me a fell d'in mont d'ar Baradoz. Ret eo d'in eta kerzout en hent.*

\*  
\*\*

*N'eer ket d'an Neñv hep kemer poan : an hent a gas du-hont a zo striz ha diaes. Met daoust pegen rust e vo, me a venn derc'hel gant an hent en deus Hor Salver Jezuz-Krist diskouezet d'eomp gant e wad santel. Evidoun eu deus beret hag evidoun ez eo marvet. Evitañ e venman beva ha mervel.*

*Va silvidigez ne sell nemedoun va-unan. D'in-me hepken e vo respont eus va ene. Me a fell d'in eta, koustet a gousto, tema mad eus grasou Doue evit en em virout en e garantez santel.*

*Bremañ e fell d'in en em lakaat a-grenn gant va silvidigez, hep gortoz eun deiz pelloc'h. Eun dever eo evidoun, eun dever splann, trugarekaat pasianted vras an Aotrou Doue bet chomet d'am gortoz bete bremañ. C'hoant am eus d'en em zerc'hel e stad da vont dirak Doue, rak ne ouzon ket pegoulz e teuj d'am gervel, ha diouz ma vezin neuze, e vezin barnet ha salvet pe daonet. Ez an eta da labourat da vat evit gounit eürusted an Neñv. Met hepzoc'h, o va Doue, ne c'hellan netra ! Ho pedi a ran, dre veritou hor Salver Jezuz, dre be-*

*demou ar Werc'hez hag ar Sent, roit d'in ar c'hras da gerzout kalonek, en amzer-da-zont, dre hent ar Baradoz.*

*Kemeromp evit hon ene an daou vokedig-mañ :*

Da betra e talvezfe d'an den gounit ar bed holl, ma teu da goll e ene ?

Nec'het ha mac'homet oc'h gant e-leiz a draou, ha koulskoude n'eus nemet eun dra hag a zo ret :

ar silvidigez.

Adskrivet gant GOURNADEC'H.

## Ret eo kompren an traou

Eun dervez e teuas eur paotr yaouank da gofes gant sant Anton a Badou. Anzav a reas beza skoet, en eur barr kounnar, eun taol-troad gant e vamm. Evit diskouez d'ezan pegen bras pec'hed a oa an dra-se, ar sant a lavaras evel-hen :

*« Evit eur pec'hed evel hennez, ne vefe ket re d'an troad-se beza troc'het. »*

Distro d'ar gêr, ar paotr yaouank a gemer eur vouc'hal, a droc'h e droad, hag a gouez hep anaoudegez war leurenn ar gambr.

E vamm a bignas dioustu o klevout an trouz. Spontet o welout gwad he mab o redek, e komprenas raktal petra a oa bet kiriek d'ezan d'ober an taol-se. Hag hi ha mont buan da gerc'hat sant Anton.

Heman, an daerou en e zaoulagad, a c'houlennas gant Doue eur burzud. Tapout a reas an troad troc'het, hag hen stagas a-nevez ouz gar ar paotr yaouank deut da veza ken dilu ha biskoaz. Ne chomas nemet, tro-dro, eur roudenn ruz evel eun testeni eus ar mirakl graet gant sant Anton.

O tamall d'ar mab digalon e bec'hed, ar misioner brudet ne c'houre'hemenne ket d'ezan troc'ha e droad, met kaout glac'har d'ar boan graet d'e vamm ha beza diwar-vreman eur bugel fur ha doujus.

Ret eo kompren mat an traou...

## Lennit ha roit da lenn

An Oferenn displeget gant taolennou

priz : 1 fr. 50 ; dre ar post : 1 fr. 75

I. a Sainte Messe expliquée et illustrée

priz : 1 fr. 50 ; dre ar post : 1 fr. 75.

Eun dibab Kantigou

gant kantigou nevez — dreist-holl unan da gana a-lied

an oferenn — savet gant an Tad Barnabe. — Priz : 0 fr. 60

## Lennit ha roit da lenn

